

D'an 22 a viz C'hwevrer

- **Gouel Kador Sant Pêr** o lidañ diazezidigezh gwaziadezh sant Pêr hag e warlerc'hidi war Roma hag an holl ilizoù ma'z int galvet da bennren er garitez, da gadarnaat ar wirionez ha da vezañ mammenn ha maen-diazez an unaniezh.

Betek ar ^{XVI}^{vet} kantved e oa d'an deiz-mañ gouel unel Kador sant Pêr, anvet *Natale Petri de Cathedra*. Adalek 1558 avat e voe merket Gouel Kador sant Pêr *Roma* d'an 18 a viz Genver hag an 22 a viz C'hwevrer a voe miret evit Kador sant Pêr *Antiokeia*. Eno, Kêrbenn Reter an impalaeriezh, lec'h ma oa kresket niver ar gumuniezhi kristen dre berzh labour sant Barnabas, e reas an Abostol, ur wezh kuitaet Jeruzalem, e lec'h annez. Eno eo e voe roet an anv a gristenion d'an diskibled. Goude seizh bloaz avat e kendalc'has sant Pêr gant e hent o kas gantañ tonkad an Iliz : lec'h ma varvo e lezo ivez e ziskennadur hag e teuo Roma da vezañ kêrbenn ar bed a-bezh. Abaoe 1969 eo bet ratreet gouel unel Kador sant Pêr d'an 22 a viz C'hwevrer o pouezañ war waziadezh an Abostol muioc'h eget war e stalidigezh lec'hel. E Venezia, en iliz Sant-Pêr, e keheler Kador an Abostol p'edo en Antiokeia a voe profet d'an Doj gant an impalaer bizantat Mikael VIII Paleologos.

- Er ^V^{vet} kantved, **ar sent Talasa ha Limnea**, menec'h, feizvonnourion.

Hervez Teodoret Kyrros en e "*Istor menec'h Siria*" e vevjont o-daou er vrasañ sioulded, serret e bep a gloz, o komz ral a wezh gant o gweladennerion dre ur prenestrig strizh, met bepred o komz ouzh Doue o daouarn troet davet an neñv.

- E 1270, e Longchamp, nepell diouzh Pariz, **ar wenvidigez Izabel**, gwerc'hez.

Hag hi c'hoar sant Loeiz roue Bro-C'hall e nac'has dimeziñ gant priñsed hag e savas ur manati a C'Hoarezed Minorezed ma vebas ganto en uvelled hag er baourentez.

- E 1297, e Toscana, ganedigezh en neñvoù **santez Marc'harid a Gortona**, penitiourez.

Roet e oa da blijadurioù ar vuhez pa voe skoet gant marv he c'hariad. Degemeret e Trede-Urzh Sant Frañsez en em dennas en arvesterezh beziadoù an neñv pinvidikaet gant Doue eus donezonoù radwerc'hioù liesseurt.

- Er ^{VII}^{vet} kantved, **sant Gwinnog ar Yaouank**, diskibl sant Judog hemañ diazezour abatioù en hanternoz Bro-C'hall.

- E Kernev-Veur, er ^V^{vet} kantved., **sant Elwin**, abostolour ar feiz.

- E hanternoz enezenn Vreizh, e 927, **sant Maelverc'hed**, abad enez Iona.

D'an 23 a viz C'hwevrer

- E 155, merzherenti **sant Polykarp**, eskob Smirna e Turkia.

Gouez da sant Ireneos en doa Polykarp "*kendivizet gant sant Yann ha tud all o devoa anavezet an Aotrou*" hag e c'helle "*komz eus ar pezh a ouie drezo eus e gelennadurezh hag eus e vurzhudoù*." Ereet ouzh peul un tantad "*e rentas grasoù d'an Tad da c'hellout kevuniañ ouzh kaliriad an Aotrou a-benn dasorc'hiñ evit buhez peurbadus ar c'horf hag an ene, e disiegezh ar Spered Glan*."

- Er ^{IV}^{re} kantved, **sant Veterin**, beleg feizvonnour.

Diskibl da sant Varzhin, e tieubas Bro-Anjev eus an idolouriezh o tegas sklêrijenn an Aviel.

- War-dro 661, **sant Boisil pe Boswell**, abad Melros e Bro-Saoz.

Diskibl sant Aezan Lindisfarn e voe diuzet abad Melros. Biblour anavezet ha prezeger helavar, e voe grataet dezhañ donezon an diougan. Stummañ a reas sant Kutberzh ha sant Herbert. Mervel a reas diwar ar vosenn. Roet en deus e anv da gêr Cille Bhoisil e Bro-Skos.

- E 722, **santez Mildburg**, abadez, merc'h Marewald, roue an Angled ha santez Ermenburg, c'hoar santez Milgid ha santez Mildred.

Gwiskañ a eas ar ouel gant he c'hoar santez Milgid en abati Wenlock ma voe an abadez anezhañ ha grataet eus grasoù kevrinel.

- En Iwerzhon e 549, **sant Finian Clúain Ioráird**, abad iwerzonat lesanvet *Kelenner sent Iwerzhon*. Ganet war-dro 470 en Iwerzhon e voe kanttroet gant diskibled sant Padrig hag ez eas da Vro-Gembre lec'h ma voe diskibl sant Dewi. Distroet da Iwerzhon war-dro 520 e tiazegas abati Clúain Ioráird lec'h ma voe stummet ar sent Kieran Yaouank, Kolomba, Brendan Birr, Brendan Clúain Fearta, Elouan hag all.

D'ar 24 a viz C'hwevrer

- E 304, e Kaezarea Kappadokea, merzherenti **sant Serj**, penitiour.

Mennet da vevañ e peoc'h dindan sell Doue ez eas da benitiour nepell diouzh ar gêr. Harzet en abeg d'e feiz, e voe jahinet ha dibennet. E relegoù zo bet treuzkaset d'an Andalousia.

- War-dro 600, **sant Liudhard pe Letard**, eskob Silvanectis (Senlis).

Mont a reas gant Bertha, merc'h Caribert, roue Pariz, pa zimezas gant Ethelbert, roue Kent, hag en devoe ur perzh a-bouez e kanttroidigezh hemañ. Sebeliet e voe en iliz Sant-Pêr & Sant-Paol Kêrgent.

- E 616, **sant Ethelbert**, roue Kent. Badezet gant sant Eosten Kêrgent nevez kaset da avialañ Bro-Saoz gant ar pab sant Gregor, e voe ar roue kristen kentañ e-touez an Angled.

Gouestlañ a reas ugent vloaz diwezhañ e vuhez da astenn ar feiz katolik en e vro. Sevel a reas iliz-veur Sant-Paol e London.

- E Breizh, er VI^{vet} pe VII^{vet} kantved, **sant Kenan**, beleg e Plougernev, diskibl sant Jaoua ha keneil sant Tenenan.

- E Bro-Skos, e 927, distro da Zoue **sant Kommin**, abad, lerc'hiader sant Koulmkel en enez Iona, a skrivas *Buhez Sant Koulmkell* hag oberenoù all.

- E 618, **sant Leobard**, manac'h iwerzhonat. Diskibl sant Koulman e Luxovium, e voe abad kentañ Marmoutier e Bro-Elzas.

- D'an hevelep deiz, en ilizoù ar Reter, gouel **dizoloidigezh klopenn sant Yann-Vadezour**.

D'ar 25 a viz C'hwevrer

- E 250, e Perga e Pamphylia, merzherenti **sant Nestor**, eskob Magydos. Da vare heskinadeg Decius e voe kroazstaget evel e vestr war urzh gouarnour ar vro.

- Etre 286 ha 305, merzherenti **sant Alexandre ar Romanad**. Legionour e oa e Roma pa voe harzet dre ma nac'he kinnig ezañs da Jupiter.

Da gentañ e voe staget a-istreibilh ouzh e vizied ha kannet kriz ha neuze lakaet da gerzhout a-hed daou-ugent devezh betek Drizipara hiziv Büyük Karistiran e Turkia e voe dibennet da vare Diocletianus ha Maximianus.

- E 369, distro da Zoue ene **sant Sezer Nazianzus**, feizvonnour, breur yaouer sant Gregor Nazianzus.

Mont a reas d'e heul d'ober e studioù hag e teuas da vezañ mezeg e lez an impalaer e Kêrgustentin ha da c'houde kester ar c'hellidoù foran e Nikaia. Evel ma oa ar c'hiz d'ar c'houlz se n'eo nemet diwezhat e c'houlennas ar vadeziant hag e varvas nebeut amzer goude o lezel e vadoù d'ar beorion.

- E 779, e Frankonia, **santez Walburg pe Gauburg**, abadez.

Merc'h da sant Richarz, roue Bro-Saoz, e voe desavet e manati Dorset, ha kaset da C'Hermania war c'houlenn sant Bonifas evit gouarn manati manac'hezed Heidenheim.

Goude marv sant Winibald he breur, e c'houarnas ivez manati amezek ar venec'h.

- E 696, **santez Adeltrud**, merc'h santez Waltrud ha sant Visant Madelgair, c'hoar sant Landri, sant Dentelin, ha santez Matelbert, abadez abati Maubeuge bet diazezet gant santez Aldegonda, he moereb.

- Er bloaz a c'hras 1117, **ar gwenvidig Roperzh Ervrezhel**, abad.

Ganet war-dro 1047 en Ervrezhell e-kichen Gwerc'h e Bro-Roazhon e voe ur prezeger gredus hag a vodas betek tri mil a dud tro-dro dezhañ evit bevañ eus karantez Doue er vuhez leanel, sevel a reas abati Fontevraod e Bro-C'hall.

D'ar 26 a viz C'hwevrer

- E 421, **sant Porphyre Gaza**, eskob, feizvonnour.

Ganet e Tesalonike, e vevas pemp bloavezh evel penitiour e gouelec'h Sete en Egipt ha kement-all en tu all d'ar stêr Yordan. Anvet eskob Gaza e kanttroas kalz a dud divadez hag e tiskaras temploù pagan hogen en devoe kalz a zismegoù da c'houzañv digant o dalc'hidi.

- E 490, **santez Irena Gaza**, gwerc'hez.

Ur wezh ma rankas sant Porphyre tec'hout diouzh e di eskobel dirak paganed reveulzet e kavas repu gant unan eus e veleion e ti ar plac'h yaouank Irena a veve gant he mamm-gozh hag o c'huzhas war al leur-doenn. Gonezet d'ar feiz ha badezet gant an eskob en em ouestlas homañ da Zoue.

- War-dro 676, e Bro-Saoz, **santez Milgid** (Gl. Milgite), gwerc'hez, beneadez.

Merc'h Merewald roue an Angled ha santez Ermenburg e oa ha choar santez Milburg ha santez Mildred. Gwiskañ a eas ar ouel gant he c'hoar Milburg en abati Wenlock.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Tadeu**, abad-beleg, merzher, drouklazhet e-kerz e oferenn gant Aotrou ar Faou.

- Bepred e Breizh hag er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Koufinid**, arriagon hag eskob en Aled war-lerc'h sant Gurwal.

- Er ^{VII}^{vet} kantved, **sant Arzhvael**, eskob en Aled.

- En ^X^{vet} kantved, **sant Oned** pe **Onen**, manac'h penitiour eus abati Sant-Meven.

- E 1658, distro da Zoue ene **an Tad Yann Rigoleuc**, beleg jezuist.

Ganet e Kintin e 1595 ez eas da veleg e Keneilezh Jezuz lec'h ma voe stummet gant an Tad Lallemand. En em reiñ a reas d'ar misionoù gant an tad Maner hag e voe unan eus tudennoù veur adsav ar feiz e Breizh er ^{XVII}^{vet} kantved. Diazezañ a reas kloerdi Gwened.

D'ar 27 a viz C'hwevrer

- War-dro 303, merzherenti **santez Honorina**. Ezel eus meuriad Galian ar gKaletiz (Gl. Calètes) a roas o anv d'ar vro Pagus Caletus (Bro Caux) e Normandia, e voe merzheriet gant ar Romaned e Lillebonne.

He c'horf taolet er stêr Saena a voe serret ha sebliet e Graille hogen, da vare aloubadegoù an Normaned, e voe kaset e relegoù da gConflans-Sainte-Honorine.

- E 596, distro da Zoue ene **sant Leandr**, eskob kêr-Sevilla e Bro-Spagn.

Karget eus stummidigezh mab roue ar Vizigoted hag a oa ariaded e tegasas en-dro holl Iliz Bro-Spagn a-gevret gantañ d'ar wirionez ha d'an unvaniezh katolik.

- War-dro 1005, en Armenia, ganedigezh en neñvoù **sant Gregor Narek**, abad ha doazhour an Iliz. Illur en abeg d'e gelennadurezh, d'e skridoù ha d'e ouiziegezh kevrinel eo bet diskleriet doazhour eus an Iliz gant ar Pab Frañsez hag enskrivet en deiziataer roman e 2021.

- E 1862 en Abruzzo en Italia, **sant Gabriel an Addolorata**, lean.

Ganet Francesco Possenti, e Assisi en Italia, e troas kein ouzh hoaloù ar bed d'e c'hwezek vloaz evit mont e-touez leaned ar Basion (Congregatio Jesu Christi Passionis). D'e bevar bloaz warn-ugent, skoet gant an dorzhellegezh, e kinnigas e vuhez er gwashañ poanioù a ziwaskas unanet start ouzh Doue el levenez hag er garitez uhelañ.

- D'an hevelep deiz, **santez Sesilin**, penitiourez e Bro-Naoned.

- En Iwerzhon, er ^{VI}^{vet} kantved, **sant Komman**, abad a savas ur manati.

- E Breizh, er bloaz a c'hras 1632, distro da Zoue enen **Mamm Mari an Enkorfidigezh** ganet **Amaurie Trochet**, Ursuladez kentañ Breizh, kevrinourez souezhus, diouganerez ha burzhudourez. Ganet en eskopti Sant-Maloù e 1595, ez eas da leanez e Pariz e 1617, e kouent an Ursuladezed diazezet gant an Itron Sainte-Beuve hag e voe kaset da Bloermael e 1624 evit diazezañ ur gouent. C'hwec'h vloaz goude e tiazegas kouent Roazhon lec'h ma varvas.

D'an 28 a viz C'hwevrer

- Er ^I^{añ} kantved, **santez Nimfaz ha sant Eubouloz**, diskibled sant Paol.

Meneget e voe gantañ an eil en e lizher d'ar Goloseiz (4,15), hag egile en Eil Lizher da Dimozeoz.

- E 457, en Egipt, merzherenti **sant Proter**, eskob Aleksandria, lakaet d'ar marv gant disivouderion, en abeg d'e fealded ouzh ar gelennadurezh reizh diwar-benn ar C'hrist gwir Doue ha gwir den.

- Er V^{vet} kantved, **ar sent Roman ha Lupisin**, menec'h.

Goude bezañ bet manac'h e Bro-Lugdunon (Lyon) ez eas gant e vreur d'ar Jura lec'h ma voent penitiourion a-raok sachañ ur bern diskibled, penn-kentañ abati Condat lec'h ma varvas Roman e 460.

- E 1936 e Auteuil e Bro-C'hall, **ar gwenvidig Daniel Brottier**, beleg eus Kongregadur Tadoù ar Spered Santel.

En em reiñ a reas a-grenn da oberenn Emzivadeg Deskarded Auteuil ma oa deuet da vezañ ar rener anezhi e 1923. Sevel a reas ur chapel da santez Tereza Lesawez a vo santelezh e 1925 hag e fizias enni ar vugale hag an oberenn.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Rivelen**, eskob-abad e Bro-Dreger.

Ganet e Breizh-Veur e teuas d'an Arvorig lec'h ma voe dibabet gant sant Tudual da gemer e gargoù war e lerc'h.

- E Kembre, **sant Maezhog** pe **Aez** pe **Aezan**, Iwerzhonad, eskob e Morgannwg.

- E Kembre c'hoazh, **sant Madeg**, manac'h e Gouer e Kembre.

- En Iwerzhon, e 610, **sant Siollan** pe **Silian**, eskob-abad, warlerc'hiad sant Komgall e manati Bangor en Iwerzhon.